



Potr JLUEN

# AN DALC'H !

Kinniget gant doujans d'am holl genvroiz

---

*« E keit ma vo rec'hier war ribl ar mor,  
Komzomp Brezoneg, yez koz an Arvor »*

P. J.



PLOUNERIN, AR 26 A VIZ EOST 1928



# AN DALC'H

---

(Da veza displeget, pe kanet war don  
« An Durzunell » pe « Sorc'henn Furlutenn »)

Dre forz monet d'ar stivel, 'tor ar pod e flutenn.  
Sede c'hoaz eur rizmadell. Petra 'vo ?... Eur stultenn !...  
Dre forz stegna va zelenn, e teu da valbouzat,  
Hag e c'halfen, marteze, eun tamm re babouzat.

N'omp ket deut, evit doare, amân da skuilh daerou,  
Ha ma sav da hen-ha-hen, eun tamm c'hoen 'n e loerou,  
E ray evel Yann Druilhenn, al laou ouz hen krignat,  
E gemero, sur, an tec'h, 'vit en em grafignat.

Pa 'z omp a-stroll 'n em vodet, n' kerz eur gouel brezonek,  
E tleomp holl, d'am meno, beza tud kalonek ;  
Eur gouel a dremen, dillo, evel eur luc'hedenn,  
Ma ne van tra war e lerc'h, na pebez planedenn !

War eur c'hoariva kaer-dreist, 'eo brao, brao, latennat,  
Lakat an dud da c'hoarzin, da ouela eur pennad,  
Jorgellat dre ar ruiou, e Breiziz drouk-wisket,  
Hon yez koz, gant se hepken, barrek ?... N'eo ket risket.

Pa skiltr ar c'horn, an drompilh, a-us d'ar menezioù,  
O c'hervel an dud d'an tan, da betra enkreziou !  
An tan-gwal 'zo enaouet. Ar C'hog ruz e gribenn,  
A enep d'hon Feiz, d'hon Yez, a sko 'vel eun dibenn.

Evit kas hon erv da benn : selvel yez hon Zadou,  
Rei kôf, lufr ha sked d'hon « Breiz » e zo ezomm madou ;  
Ar c'haera : beza pennek, lakat don 'n hon spered,  
N'omp ket gant hon Brezoneg, o klask lonka stered.

Bet hon deus evel herez, digant hon c'hendadou,  
Eur Feiz grenv, eur Yez dispar. Na kaerat trevadou !  
Na vezomp ket' ta ganaz : 'lec'h yenaat, klouari,  
Lavaromp : « Kentoc'h mervel eget 'n em gailhari.

Ha petra 'welomp-ni ken, a-dreuz, a-hed hon Breiz !  
O torfed an euzusa !... Ma gwad a sklas 'n em c'hreiz !  
Tud a bep stad, a bep oad, bemdez o venegi,  
E tleer, en hon amzer, nemetken gallegi.

Sellit ouz Janedig vrao, anezi eul lorc'henn,  
N'he deus ken, siouaz ! siouaz ! nann nemet eur sorc'henn :  
Gragouilhat eun tamm galleg. Ne oar ken, emezi  
Ha gantañ e kavo, well, Aotrou da zemezi.

Mont a ray d'ar sul da noz, d'ober eun abadenn :  
He mamm he lez da fraonval. N'e ket he c'holladenn !  
Hejet ganti he stripou, en eur distrei d'ar gêr,  
E lavaro d'he Yannig, e bris galleg, treou kaer.

An heol re a-bred 'savo, kredit, 'viti d'al lun ;  
Janedig, he c'horf brevet, a sacho war he c'hun.  
Ha pa 'z ay, ar goantigenn, da gas he zaoud er-maez  
E c'hallego d'he loened, dinec'h, ar plac'hig kaez !

D'eomp c'hoaz d'ober eun dro, ha diskennomp e kêr,  
Ma ne deo ket, mignoned, kalz re denn war ho lêr.  
Azezet war he zreuziou, sede eun douzadenn,  
O c'hedal an tremeniad, da gaout eur wilchadenn.

War he fenn kreouichennek, he deus eun daledenn :  
Disparbuilh 'eo he jave, re verr he Jakedenn.  
Hag ez afec'h da sponta ?... N'eo ket breman ar c'hiz ?  
Ha « mamzell » a deus, moarvat, eul lod e park ar Briz.

Tostaomp eun tamm outi ; N'eo ket drouk ar flourenn.  
Libistret he deus, mar plij, ha diweuz, ha mourenn.  
Ar mouilc'hi beg-melen, a oa stank en hon bro,  
Sede ar voualc'h beg-ruz, en em gavet d'he zro.

« Skuis-divi, gant hir-bale, war gaout eur fallaënn  
« Em eus kavet mat ober, amân, eur spanënn.  
« Ha komz a rer Brezoneg, e-trezoc'h c'hoaz e kêr ?  
« Me hoc'h asped, demezell, lavarit berr-ha-berr. » —

« Petra 'sonjet, paourkez kouer ! Ze 'zo mat, war ar maez  
« Amân ne vez ket, « Monsieur », te 'oar, ribotet laez.  
« Kêriz 'zo « sivilizet », fell ket d'ezo frega,  
« Frega, moarvat, o genou, nann, o vrezonega.

« Red 'eo heulian ar « Progrès ». N'emân ken an avel,  
« A-du gant ar Brezoneg, « langaj » bro ma c'havel.  
« Gant ar galleg, 'n'hon amzer, e ya dre-holl ar maout ;  
« N'eo mat ken ho koz yez koz, nemet war dro ar saoud. » —

Sede aze eur skeudenn eus an amzer a ren.  
Yez hon Bro 'zo disprizet, peurvuiân gant mab den,  
Gweet d'ezân e spered gant tezennoù Bro-C'hall,  
Hadet 'n hon Bro Breiz-Izel, gant tud ganaz ha fall.

'C'houez an avel, 'me mammgoz, diwar ar Gornaoueg,  
E vez tapet aliës ouspenn eur genaoueg.  
Breman a-us d'hon maeziou, e skrij an avel-bis  
Da sklasa hon bannac'h gwad, ma ne sellomp ket spiz.

War sav ! holl'ta, dorn-ouz-dorn, e kêr ha war ar maez.  
Roomp bec'h d'ar Brezoneg, kuit da gaout aon na mez.  
War roudou hon C'hendadou, kerzomp bemdez, bemnoz  
Hag hon Yez c'hoaz a vleunio, dindan gred o bennoz.

*POTR JULUEN.*